

20
ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGOL

Savet gant ar Roue Gralon
GOUDE MA OA BEUZET KÆR IS

'Nep a bed Gueroches Remengol
Birviquen ne nañ da goll.

253 D
c

En escopti Ker-
ne, el lec'h em
brema môr Dou-
arnenez, e oa gu-
chal eur gaer
vras meurbet,
hanvet Is.

Eur voguer le-
dant hag huel
gant sclujou ou-
arn he difenne
deus ar môr. Er
gaer-ze ne velet,
e touez an dud
pinvidic, nemet
dizurs, goal
exempl ha falla-
griez. Gralon, pe-
hini a chome
neuze en Is, a oa
roue Breiz-Izel.
Bet e oa brezeller



AN ITRON VARIA REMENGOL

daou abostol zantel, daou vignon da Zoue, sant Kaozrantin, kenta
escop a Guemper, ha sant Guenole (1), kenta abad a Landevennec;
alies o devoa prezeguet ar feiz er gaer a Is, ha gourdrouzet ar roue
Gralon abalamour d'an droug-oberou, d'an torfejou ha d'an injusti-
goz a rene bemde en pales e verc'h yaouanq; mæs goab a red ane-
zo, hag ar Roue simpleet dre an oad, n'en doa mui a c'halloud
avoalc'h evit areti dizurzou ar gaer vras.

Doze a skuisas er fin, o veled Is kaledet en he fec'hejou, hag a
roas da anaout da Æl Breiz-Izel, e vignon Guenole, penaos heb dat
pell, ar gaer gaer-ze a vije beuzet gant ar môr. Kerkent Guenole a
bignas var e varc'h, hag a redas da gaer a Is, e sonjel c'hoas disarmi
koler Doue. Mæs tremenet e oa an amzer a druez. Pa en em gavas
an abad zintel, var dro an'er-nos, sclujou Is a oa digor, hag ar
môr a c'hroze spontus o tiruilla var an dud, an tier hag ar palejou.
Guenole ne allas sovetis nemet Gralon hep quen; guelet a rer
c'hoas roudou treid e varc'h er garrek, var behini, aboue, abad
Landevennec, araog komer o c'harg a deu da ober o faden ha da
hanaout ar roue Gralon evit fundatour ho c'houent.

Kær Is ne ma mui, evel Sodom, Gomor ha Babylone; hag herie
ar môr a ruil dreist he fenn.

(1) *Guen-oll-e, O.I-e-Guen* (il est tout blanc), hanvet evel-so gant he
vam, ar santez Ven, abalamour ma oa eur buguel koant ha fur. Zant
Guenole, dre e vertuziou, en deus meritet an hano koant a kær a Æl
Breiz-Izel (l'Ange de la Bretagne).

Da zav-heol, Gralon o veza pignet gant Guenole var lein Mene-Hom, a dolas ac'hane eur zel truezus var e les'h, mæs e lec'h ma edo ar gær kær a Is, ne velas mui nemet môr Douarnenez, hag e kouezas d'an daoulin evit trugarecad Doue hag a Verc'hes da veza zoveteet e vuez.

Pa zavas divar e zaoulin, e velas dindan an heol, o luguærni, *Ru-Men-Goulou*, pe *Men-Ru-ar-Goulou*, var pehini vije sacrificiet tud beo, ha hep mæs eur buguel bihan c'hoas eus ar vron. Neuzæ, bæuzet en he zaelou, hep e zaoulagad savet etrezek an Ev e lavaras d'he vignon zantel :

« Var ar Men ru zo consacret da eun doue barbar, me a reiñ zével
« eun ilis gær d'ar Verc'hes, hag e lec'h ma skuiller ar goad da
« Teatatès, e skuillo Mam ar guir Doue he graçou var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad de bromesse, ha beleien ar Bayanet, o veza em revoltet pa veljont dispen templ an doue fias Teatatès, ar Roue kristen ho zebas e kever Argol, e pen ar Vretonned convertisset.

Goule beza gret e beden var Mene-Hom, ar roue Gralon a heuillas Guenole da abatty Landevennec, savet gantan eun neubeut a blavezion kentoc'h. Diarog kement-se, en devoa c'hoas roet he bales, en Kemper, da zant Kaourantin, pehini e doa torret e naon dezan ha de compagnez gant eun tam deus he bek bihan. E plaç ar palesse, emma brema ilis kær cathedral Kemper.

Gralon a dremenas e Landevennec a rest deus he vue en eur bingen kalet, hag alies a zei gant he vignon kær da Remengol da bedi vit he bobl an *Itron-Varia-Remed-Oll*. Beza en devoa an heur d'e guelet, brudet bars e pevar c'horn Breiz-Izel, hag o vervel entre divrec'h zant Guenole, e Landevennec, e recommande he hine da Zoue en eur lavaret gant fiçians :

« Itron Varia Remengol,

« Miret ouzin na zin da goll,

« Pedit ive o Mab Jesus,

« Ma vezin gantan evurus. »

C'houezec kant vras a zo aboe ma e maro Gralon, hag ar Vretonned, pere zo bepred tud a feiz hag a galon, ho deus c'hoas sonj eus a Roue koz, hag e vignon zant Guenole. Mæs na c'hanavefent guelloc'h histor ho bro kær, pa zeont da zut an Drinlet da bardon bras Remengoll a da velout môr Douarnenez, Mene-Hom, Landevennec, ha tour huel ilis miraculus an *Itron-Varia-Remed-Oll*, e lavarent, an daëlou en ho daoulagad, en eur vale gant respect var douar ar Sænt hag ar Rouane :

« Bras ar burzudo a zo bet,

« Ebars an amzer tremeuet ! »

Bras ive ar luburdon a ra c'hoas herie an Itron Varia Remengol en andred an holl Vretonned, nag ispicial en andred ar belerinet a deu bemde d'ne guelet, alies deus a bell bro, kats anezo dierc'hen hag e corf o rochedou. Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour, ar beorien noas, sond rdet Breiz-Izel en kreis tan ar brezel, ar vartolodet var ar môr bras en furol, an oll dud affliget a gorf, a galon hag a spered, dan en o foanniou, darn en dangeriou, darn all en disesper, hag oll var gule ar maro ho deus sonj eus ho Mam douç ha mad, alies e leveront dezi gant karante ha gant fiçians en he galoud hag en e madelez :

« Guerc'hes sacr a Pemengol, patronez Breiz-Izel,
« Pedit evidomp, herie ha pa renkin mervel ;
« Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonned,
« Ho deus ho karet, ho kar hag ho karo bepret. »

KANTIC SPIRITUEL

EN ENOR

D'AN ITRON VARIA REMENGOL (1)

PATRONEZ BREIZ-IZEL

*Kurunet dre urz hag en hano en Tad santel ar PAB PI NAO, an
30 a vis mae 1858 gant an aotrou RENAN NICOLAS SERGENT,
Escop Kemper ha Léon, dirag eun nivern bras a veleen hac
ouspen kant mil den, deut en devez-ze, a peb bro, da Ru-
mengol (2).*

Itron Varia Remed-oll,
Miret ouzimb ne c'hampda goll.

Guerc'hes sacr a Remengol, patronez a Breiz-Izel,
Pedet evidomp, hirie, a pa renkin mervel.

Var an ton : *Glac'har ar Werc'hez*

Tad, Mab, ha Speret Santel, tri ferson an Drindet,
Me o ped, a wir galon da rai din a speret,
Da composi eur c'hantik da stereden vaillant
Ar fourdelizen gaëra, demeus ar firmamant.

Ho Merc'h eo, Tad Eternel, ar Werc'hes biniguet.
Pried ar Spered Santel Rouanez en Aled,
Dreist an oll groeguez devot, hi zo bet cavet ding,
Da veza mam da Jésus hon Redemptor divin,

(1) Remengol, hanvet gwechal, *Ru-men-goulou*, da lavarele *Men-ru-ar-
Goulou*, a balamour ma oa eno eur men ru, pe eun templ consacret da
c'houlou De, enoret evel eun Doue dindan an hano a Teutatès (Doue Tud)
ar roue Gralon. goude beza diskaret an templ-ze a zavas en e blaç eun
illis kaër da Mam ar guir Doue, chanchas hano payen *Ru-men-goulou*
en hano kristen a *Remengol* a lavared e *Remed-oll*, deus a behini
ar Batrones a zo hanvet an *Itron Varia Remed-oll*, (*Notre-Dame de
Tout remède*) abalamour da burzudou bras a ra bemdez eno, a Werc'hes ;
aboue amzer ar roue Gralon betec hirie.

Remengol a zo bet, a viscoaz ar gaera, ar santella iliz a Vreiz-Izel
herves an dud koz, peb guir Vreton a gle eur veach da viana, *beo pe-
saro*, ober pelerinach Remengol.

(2) Kurunen an Itron Varia Remengol, ar gaera zo bet gullet biskoas en
Breiz-Izel, a zo en aour hag e perles.

Pa zeuan da niv'eri, Guerc'hes sacr a santel,
An enor, ar meulodi hoc'h eus e Breiz-Izel,
Va speret a zo dister evit o tiscleria,
Nemet doc'h hu a zeufe, hirie d'am azista.

Mæs ennoc'h leun a fianç em euz entreprenet
Publia ho calloud vras touez ar Vretouned,
Ha disclera ar graçou accordet da bed oll,
Dre c'hrac Jésus hom Autrou, en Ilis Rédemptor.

E ped lec'h meo enoret. Mari hom mam santel,
Alies ve si aout neb so dezi fidel.
Mes beza e deus eur plaç bras en pini bemdes,
E scuill var ar Vretonet tensor ho madeles.

Er plaç ze, e Breiz Izel, meurbet d'arempredet,
En escopli a Guerne, er barouz a Hanvec,
Euz eun i is consacret de c'hloar ha de enor,
Rouanez an oll Æle, guir vam hom Remengol.

Guir dud devot d'ar Werc'hes, m'ho ped diredet oll,
Deut gant laouenediguez da ilis Remengol,
Evit pedi mam Doue da rei deoc'h ar yec'het,
Ha da sivoal hoc'h ene dious laç an droug speret.

M'an de poanio oc'h ene gant gouliou ar pec'het,
Deut d'ar sourcen ar vuez, hag o pezo remed ;
Goulennet oc'h mam Jésus graçou celestiel,
Ma c'hellet chanç a vuez, beza dezi fidel.

Ma be ho corf forbuet gant infirmite,
Deut a ilis Remengol gant eur guir garante,
Er plaç leun a viraclou dre c'hras ar Werc'hes sacr,
Pini en oc'h oll boanniou ho soulajou timat.

A bevar c'horn Breiz-Izel e teu pelerinet
Da bedi Mam hom Zalver gant eur galon parfet ;
Eus an eskopti Leon, Treguer, Guened, Kerne,
E teu an oll tud devot da veuli Mam Doue.

Dre ar brut eus ar miraclou a ra e Remengol,
Dre graç Jesus hon Autrou, e deus ar galloud oll,
Mar teu ar belerinet bemdes epad ar Bloas,
D'ober an dro d'he ilis var ben ho daoulin noas,

Eun nombr bras a viraclou a ra ar Werc'hes sacr,
Ebars ilis Remengol dre c'hras Jesus e Mab ;
Dre ne sicour galoudus om eus antreprenet
Discleria lod anezo e touez ar Vretonned.

Ar Werc'hes a Remengol, er bares a Hanvec,
E devez gret a nevez eur miracl kaër meurbet,
An oll a zo estonet oc'h he consideri :
N'en deus netra impossibl d'ac'hu, Guerc'hes Vari.

A dost dezi eur buguel c'hoas en eun oat dister,
Pa oa ar vilin o vala, a guezas er rivier ;
Gant an dour e voa ruillet, ma c'has en toul ar bal,
Ma songer a voa flastret, allas ! gant an dour mal.

E dud gant cals nec'hamant, ha melconiet oll,
Er goestlas, a voues huel, da Werc'hes Remengoll ;
Mari, leun a garantez dre e dorn biniguët,
A ziouelas e vue, er meas e voe tenet.

Evit rei guir desteni deuz ar miracl kaër-ze,
Ar buguel da Remengol a voa kasset neuze,
Laket er procession, gantan eur c'houlouen,
Evit publia gallout ar Werc'hes souveren.

A dost d'ar C'hastel Nevez, herve ma eo prouvet,
He deuz gret, guir Vam Doue, eur miracl kaër meurbet,
Dre an tan eun tieguez a che da berissa,
P'o deuz pedet a Werc'hes d'a zont d'he assista.

An ozac'h, guir servijer d'ar Werc'hes biniguët,
En em strinquas d'an daoulin de bedi gant respet.
Mari, leun a garantez a zigaças glao bras,
Hag, hep ober droug da zen, an tan goal a vougas.

Chom a ran c'hoas sebezet. Guerc'hes, Mam a drue,
O compren ho karantez evit ho bugale ;
En diskuezet o c'heus bet d'eur c'hrouadur daou vloa,
O c'hober en e andret eur miracl a kaëra.

Dre eur tourmant a brassa eur c'hoz ty o coueza,
Eur c'hrouadur o tremen en em gav dindanna ;
Ar vein vras en dro dean, ma sonjer voa lazet,
C'hui epquen en zicouras, Rouanez an Æte,

E dud a lavare dec'h, Guerc'hes a Remed-oll :
Sicouret hor c'hrouadur, pe he c'hao da goll !
Ar vein vras zo remuet, ha dre graç ar Werc'hes,
Ar buguellic a c'hoarze dindan, leun a vuez.

Mari, hor mam souveren, var vôr ha var zouar,
A den e zervicherien dious anquen o glac har,
Nombr bras a vartolodet e deus bet preservet,
Prestic da goll o buez, p'ho deus hi he fedet.

Nombr bras ar vatimanchou e devez preservet,
Hag an dud hag a madou, dre he c'hraç biniguet ;
Ha bagou ha goberi, creis an tourmant bras,
Pa bedent hor mam Mari, a obtene e c'hraç.

C'hoas eur c'hrouadur yaouanc a escopti Leon,
A voa kouezet er rivier, Doue pebeuz eston !
Klasquet gant cals a glac'har, a pa o deus pedet,
Ar Werc hes a Remengol, en instan eo kavet.

Pa gavchont o c'hrouadur, hag en prest da vervel,
Ec'h implorjont, a nevez Mari, hom Mam santel,
Da rei dezhan ar vue he c'hras biniguet,
Dirac ar compagnonez, ho feden zo klevet.

Eun den a c'houlen Leon a gollas ar c'herzet,
Zo bet eiz miz o vale var bouez diou vas loaec,
Grêt pris gant ar medecin evit troc'ha he c'har,
Ha zroc'ha e c'hlin, Doue pebeuz glac'har.

Eun nosvez en e vele e teuas sonj deza,
E voa bet en Remengol guechal e pardonna.
Hag e zant en e c'halon eur garantez ardant.
Hag eur guir devotion d'ar Werc hes oil buissant.

Guir van Jesus, hon Aotro, eme an affliget
Va zicouret em poaniou. Rouanez an Æte,
A me rañ en donezon kaëra tra zo hem zi,
Da gass da zei ho pardon evit ho henori.

Mari, Ieun a garantez, e bedas e Mab ker,
Da exauci e beden a re he servicher,
Recev a ras ar c'herzet dre graç guir *Remed oll* ;
A ed eo oc'h he meuli en ilis Remengol.

Tregont den en eur vaguic a bares Plougastel.
A gonfontas e rad Brest, gant eur barat avel,
Oll e pedjont a galon patronez Remengol,
Eur batimant e deuas, sovetet in bet oll.

Er gaer ar Vontroulez e krogas an tan goal,
Ar flamou tan, tro var dro o velet o nijal,
Eur barner yaouanq, ractal, d'ar Werc hes a bromet,
Mont da ilis Remengol, hac an tan zo mouguet.

Evit gonit ar victor, soudardet Breiz Izel,
A bed Mari gant fisianç e creis tan ar brezel,
Hac ar vitor gonnezet, e zeont a vandenoou,
Da Remengol dierc'hen, e korf o rochedou.

Martolodet an Arvor, ruillet a diruillet,
Var ar mor bras e furol, prest da veza kollet,
Eb eor, ep stur, ep sicour, oll e renkont mervel,
Pa deu d'ho sovetat patronez Breiz-Izel !

Ne ouffe quet neveri na dont da henvel oll,
Ar miracloù infini a ra guir *Remed oll* :
Evit nep zo guir gristen a leun a galon vad,
Hi zo guir avocades dirac Jesus he mab.

Ken a gorf, ken a ene, kemen zo affliget,
Deut da illis Remengol gant eur galon parfet,
Pedit eno gant fisianç hor mam santel Mari,
Ha renoncet d'ar pec'het evit plijout dezi.

Sant Thomas ha sant Bernard, tud guizec ha santel
A da Vari mam Jesus, dao servicher fidel,
Hon assur a beurs Doue biken na zai da goll,
A nep a gar ar Werc'hez patrones Remengoll.

Demp eta da enori brema, da Remengoll
Relegou sacr ar Werc'hes, an daouzec abostol,
Ha relegou Sant-Joseph, ha guir groas hor Salver,
Maro, vit al liberté, var lein ar mene Calver.

Relegou sant Guenole, mignon bras da Zoue,
Relegou sant Kaourantin, Kenta eskop Kerne,
Ha kalz relegou all gant ar pap digasset,
E present da Remengol evit ar Vretonnet.

Kourach, kourac'h, Bretonnet, ha gant fisianç deut oll,
Da velet o patronez en iliz Remengol,
En em roet a vrema da zervicha Doue,
Ha da pedi ar Werc'hes ar rest eus ho pue,

Kement ez eo enoret ha karet gant Doue,
Ma permet ganti ober hervez he bolante ;
An niver bras ar c'hraçou a skuil d'emp var ar bed,
A dremen oll dre zaouarn ar Werc'hes biniguët.

Ar bemzec euz a vis eost, an devez ma pignas,
En Envou gant an Æle en solennité vras,
E teu an oll dud gant guir devozion,
Da ilis kaër Remengol da c'houls ar pardon.

Eun Doue oll galloudec a bermet dre c'bras,
Ma ze da zul au Drindet ema ar pardon bras,
Ar bobl euz a Vreiz-Izel a veler an deiz ze,
O tonet da Remengol da velet mam Doue.

En deiz se e c'honezer induljançou plener,
Ebars ilis Remengol e ty mam hor Salver,
En eur ober gant glac'har eur guir confession,
Hac o receo hon Salver dre ar gommunion.

D'a eilvet a guengolo, gouel he nativite,
Ez eus ar memes pardon en Illis santel-se,
A de peb gouel a Werc'hes a zo en pad ar bloa,
E teu an oll tud devot d he bisita gant joa.

Er solennite santel eus ar sul an Drindet,
Kemen a ya da pardon a so oll ravisset,
E consideri Jesus ebars er sacramant
O c'hortoz hor c'halonnou gant karante ardent.

Deut oll eta christenien, deut oll a vandennou,
Da Remengol da bedi mam Jesus hon Aotrou,
Assuret oc'h da veza gant Doue pardonnet,
Ma bec'h guir servicherien d'ar Werc'hes biniguet.

Renoncet d'ho pec'hejou hac en em arollet,
Ebars er breuriezou a zo instituet,
Da enori ar Werc'hes evel ar Rosera,
A rent d hor Mam souveren eun enor ar c'haëra.

Ne vanquet quiet da laret bemdez eur chapelet,
Lod demeus he c'hurumen, eun dizenez hanvet,
Nep a zeuio d'he recita gant karantez barfet,
A vezo guir zervicher d'ar Werc'hes biniguet,

Tud leal a Vreiz Izel, oll vignonet va bro,
C hui, evit pere cals ar vue zo c'huerou,
Joa deoc'h var an douar, ha graç digant Doue,
Da vont c'hoas da Remengol, ar sourcen ar vue.

Pedit en ho c'hlevejou, pedit en ho glac'har,
Ha pedit en oll boanniou hon deus var an douar,
Brassan santez zo er bed Guerc'hes sacr Remengol,
M'ar bezit fidel dezi, ne deot biken da goll.

Guerc'hes glorius Vari, pedet me o suppli,
Evit an oll dud devot a visito ho ty ;
Chasset an drouc sperejou demeus hor c'halonnou,
Ha presantet da Zoue bemdez hor pedennou.

Guerc'hes sacr a Remengol, patronez Breiz Izel,
Pedit evidomp, herie, ha pa rekimp mervel,
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonned,
Ho deus ho karet, ho kar hag ho kaoz bepred !

Itron Varia Remengol, mam Zantel da Zoue,
Pa vimp en heur ar maro, recevet hon ine,
Ila dre o torn biniguet kassit hi da repos,
Ha da veulin an Drindet e gloar ar barados.

PEDEN AR ROUE GRALON

D'an Itron Varia Remengol

Itron Varia Remengol,
Mirit ouzimp na zimp da goll;
Pedit ive ho mab Jesus,
Ma vezimp gantan evurus.

Itron Varia Remengol,
C'hui eo Rouannez ar bed-oll,
Bezit hor mam, hor patronez,
A ni ho meulo d'a james.

P E D E N

D'an Intron Varia Remengol

Evit beza preservet eus ar c'hlevejou, hag
ispicial eus ar c'holera-morbus

*(Ar beden-ma, lavaret a galon e deus preservet eun niver bras
a dud ha sovetet cals a re all skoet gant ar c'holera, en kaer
Montroulez er bloavez 1854.*

Itron Varia Remengol, patronez Breiz-izel, mam an oll dud affi-
get a speret, a gorf hag a galon, c'hui a souten kourach ar zoudar-
det en kreis tan ar brezel, a c'hui a asten o torn a drue d'ar varto-

lodet prest gonfont er môr bras e furol, c'hui a zisken alies e c'hras en guele ar c'hlanvour paour ho c'har, evit rei dean ar yec'het hag hanvet hoc'h en gwirione *Remed ar bed oll*. Peleet eta ouzin, Guer-c'hes sacr, ar voç n gant an oll c'hlevejou dangerus, va diaoualiteus ar maro subit, hag evit renta testeni d'ho madeles, e zin da Remengol d'ho meuli a d'ho trugarekat en oc'h ilis santel. Eno n'ho eus biscoas refuset nikun deus ho pugale; bezit trugarezus em andret. Kouskoude, a bezo gret bolante Doue, ha pa zono va heur diveza, Itron Varia Remengol, ho ped true ouzin, grit d'in mervel en ho karante evel ar sænt gallouduz, pere a beder en ho ty.

Evel-se bezet gret.

Itron Varia Remengol,
C'hui zo ar remed ar bed oll,
Peleet diouzimp an teir goalen,
Brezel, kernes hag ar voçen !

Ilis Remengol a zo bed, aboe amzer ar roue Gralon, hanvet ilis *Remed oll, an Ilis miracu.us*, abalamour d'ar miraclou bras a ra eno ar Werc'hes Vari.

Dre he galloud, ar c'hlanvour a bare,
Ar mud a gomz, lag an den kam a vale !

Hanvet eo ive *sourçen ar vue, ar feunteun ar c'hraçou*, abalamour d'ar graçou a ra Done en ilis d'an oll gristenien.

Nag a hec'her eus Doue dispartiet,
E Remengol a zo bet difastet !..

Ilis sacr an Itron Varia Remengol a zo c'hoas hanvet *Ilis ar Vre-tonned, Ilis ar Saent hag ar Rouane*, abalamour goude ma eo confrontet kær Is, ar roue Gralon a reas sevel Ilis Remengol en enor d'ar Werc'hes, evit trugarekat Doue da veza sovetet dezan e vue; mont a re alies d'he bisita, en compagnunes zant Kaourantin, kenta eskop Kemper, zant Guenole, zant Guen-Æl, ha kals a zent all, pere a veve neuze en kouant Landevennec, hag a brezegue ar feiz dre ar vro. Aboe an amzer-se, ilis Remengol a zo bet darempredet gant ar bobl a Vreiz-Izel, karguet a c'hraçou hag a induljançou ar re vrasan, roet gant hon Tad santel ar Pap hag an eskibien.

Er bloas mil heis kant pemp hag anter kant, hon Tad zantel ar Pab Pie Nao en deus roet da ilis Remengol eun tam eus wir groas hon Zalver Jesus-Christ, hag eun tam eus e gurunen spern, ar memes Pab en eus c'hoas laket kas eus a Rom da Remengol eun tam eus ar voal ar Werc'hes hag eus ar bez en pehini a voa bet sebeliet, darn eus ar relegou zant Joseph, zant Joachim, zant Ian-Badezour, zant Zachari, zantes Anna, zantes Elizabeth, an daouzec abostol, ar pevar Avieller, an doctoret bras eus an ilis, ha dre eur garante ar vrasan evit Remengol, en deus c'hoas roet d'an templ zantel-se korf zant Silven, mignon ha compagnon an abostol zant Paul, ha relegou *tri c'hant pemp ha tri ugent zant, evit pep devez ar bloaz*.

Ar c'heskop Paris en deus roet ive da ilis Remengol darn eus relegou Louis, roue Frans, santez Genovefa, patrones Paris, ha kals a re ail.

Ar c'hardinalet, arc'hescop Tour, arc'hescop Bourdel, arc'hescop Lyon, arc'hescop Rouen, escop Strasbourg, escop Chartres, escop Reason, escop Saint-Briec, escop an Naounet, an aotrou Joseph-Marie Gravean, escop Kern a Leon, maro en Kemper evel eur zant, iskibien all a Vreiz-Izel, a Franc hag eus ar vroioù all, ho deus roet da ilis Remengol, evel presanchou, ar c'haera relegou eun niver bras a saent, pere da bep pardon a ve douguet e procession gant ar belerinet.

Kement zant a ouffe ann denn da bedi en e boaniou var an douar, a zo darn eus e relegou en ilis miraculus-ze, ken karet gant ar roue Gralon; gonelet a rer eno, ouspen, relegou ar Verc'hes Santez Anna, zant Joseph, an Ebestel, etc., relegou zt Augustin, zt Ambrois, zt Jerom, zt Ian-Christostom, zt Bernard, zt Laurens, zt Sébastien, zt Roc, zt Dominic, zt Kaourantin, zt Bernard, zt Paul a Leon, zt Guenole, zt Even, etc., relegou santez Barba, santez Marc'harit, santez Katel, santez Marie-Madalen, santez Philomen, hag eun niver bras a re all, *ouspen trizec kant*, pere a so eno evel eur bobl a zent dirac an Itron Varia Remengol oc'h he fedo da skuilla he graçou var ar belerinet, deut deus a bevar avel da veuli en ilis sacr Remengol, Rouanez ar Saent, an Ales, advocades an anaoun, patronez an dul paour, esperans an oll gristennien, ha Mam ar Vretonned.

Ha brema ma breudeur, demp oll,
Demp da bardon bras Remengol,
Demp da ilis ar Vretonned
Demp da sourcen an oll remed !

Da bardon bras, pehini a bad pemp devez, var an henchou a ve gonelet a belerinet, darn bet clan gant klevejou dangerus, darn all distro divar ar mor pe eus a brezel, darn a c'ha dierehen hag en corf o rochedou goadec; oll en em strikont d'an daoulin ractal ma velont tour an ilis santel. Alies en em gav ive en ho zoues eur c'hloarec yaouanq bennag, deut evit uguent gouec'h, hag en vouela gant laounedigez ha lavar :

« Salud, douar burzudus, var behini pep kamad,
« A laka daelou a joa da zont em daoulagad,
« Salud, ilis Remengol, a gaeran zo er bed,
« Salud, va fatronez vad, Mam guer a Vretonned !... »

En he gever ive eur barz, eur pelerin koz, bed alies e pardonniou Remengol, ha deut c'hoas eur veach, var bouez he vas, d'a c'houlen eur maro inad, a zistro laouen d'ar gær en eur gana meulodi he batronez, chilaouet eo bed e beden, hag an Itron Varia Remengol en deus assuret silvidiguez d'he ine er baralos Doue, ha repos d'he eskera betek deis ar varn, en douar beniguet bered he barous, Kouskoude pelaat a ran gant anken.

Harpa ra aliez var he vaz, ha teurel a ra c'hoas eur zel a drugare var zu ilis he Vam karantezus pa ne ve mui nemet bec an tour, a koue d'an daoulin, hag e lavar, daelou en e zaoulagad :

« Kenavo 'ta Remengol, kenavo da viken.
« Kenavo, Guerc'hes Vari, c'hui pini a garan.
« Kenavo, pelerinet, kenavo tud va bro.
« Kenavo er barados, kenavo, kenavo !... »

INDULJANCOU REMENGOL

Dre eur scrif apostolik, roet en Rom, en ilis Sant-Per, d'ar bemzee a vis evoen 1855, hom tad santel ar Pab Pie Nao en deus accordet, en e vadelez, eun induljanç plenier a remission eus ho holl fec'hejou d'ar christenien pere, goude beza conveseet ha communiет, a visito, gant devotion, ilis sacr an Itron Varia Remengol, eun induljanç a seiz vloa ha ken alies a zaou-uguent devez d'an oll pelerinet, ken alies goueach ma visitor gant devotion ilis Remengol, ha ma pedit eno Doue hac an Itron Varia Remed-oll.

An induljançou ma a all besa gounezet evit an anaon.

Dre eur scrif all roet ive e Rom, en ilis Sant-Per d'an dec a vis genveur 1865 (scrif pehini a zo brema exposet en ilis Remengol var eun dolen aour, e c'hars treid ar Werc'hes, hon tad santel ar Pab en deus c'hoas roet da ilis an Itron Varia Remengol an oll graçou, induljançou, ha privilejou, accordet gant ar Pabet d'an Itron Varia Loretta, in Italie. En illis-ze e conservet an ty en pehini a chome ar Werc'hes Vari en Nazaret hac en pini eo bet consevet hac en deus bevet hon Salver J.-C.

Er blavez 1295, an Aëles a zougas a d'rous an noabl, an ty santel eus a Nazareth d'an andret hirie Loretta tost da Rom savet a so bet eno eun ilis kaër, pehini a zo bet aboue darempredet bras a karguet a c'hraçou gant ar Pabet.

Neus er bed universal nemet an ilis-se, ilis Loretta, hag ilis an Itron Varia Remengol, da bere a ve bet roet graçou ken bras, ken kaër. Ar gristenien a visito breman hag en a'ozet da zont ilis Remengol, ker brudet dre e miracloù, a c'hounezo ar memes induljançou hac ar memes graçou evel a re a Ya da Jerusalem, da Rom pe da ilis Loretta, da visita be hon Salver J.-C., beioa an ebestel ha ty a Werc'hes Vari.

Dre eur scrif hall roet en Rom, en ilis Sant-Per, hom tad santel en deus carguet escop Kemper da guruni *evitan hag en e ano* an Itron Varia Remengol; pehini so bet kuranet, devez ar pardon bras, an 30 a vis mae 1858.

Mado spirituel ken precius a zo eun testeni eus a zevotion hon Tad santel ar Pab en andret an itron Varia Remengol hag eur merk eus e garante evit ar Vretonnet, pere a gavo bepret eun ilis sacr Remengol remed en ho foaniou var an douar, pardon d'ho fec'hejou, silvidiguez d'ho ine ha delivrans d'an anaon.

MEDALEN AN ITRON VARIA REMED-OLL

Medalen an Itron Varia Remengol, *binniguet hac induljanciet* en ilis sacr Remengol dre urs hom tad santel ar Pab a ro d'an den fisianç en Doue, nerz a enep an droug speret, chanç a bonheur var ar mor, er brezel, en trubuilloù ar b'd, consolation ha remed en oll boaniou hon deus var an douar. Peb kristen a gie, e pad e vue, douguen gant respect en he guerc'hen, medalen pricius an itron Varia Remed-oll, hac en eur vervel hen lakat var e galon evit mont dirac Doue.

Lannion, Librairie Mademoiselle DUCHEMIN.